

  


# DISPUTA

ETRE AR MARO HAC AN DEN YAOUANQ.

*Ar Maro.*

Cete me éru, va mignon,  
Da ober did renta rêson  
Demeus da vue tremenet ;  
Scuis eo Doue ouz da velet.

*An Den Yaouanq.*

Autro Doue, piou eo emân  
A zo deut qen dizonj amân ?  
Va speret a zo oll troublet  
Gant epouvant eus e glevet.

*Ar Maro.*

Petra lavares, va mignon ?  
Lez da spont, ha cont da rêson.  
Ha na vouies-te qet ervad  
E tenjen abred pe divezad ?

*An Den Yaouanq.*

Allas ! sivoas, ne vouien qet  
E tleac'h donet qen abret ;  
Me n'ije din, pa voan dispos,  
Ne varjen, qen e vijen cós.

*Ar Maro.*

Mes alies e poa clévet  
Ne meus biscoas den espernet,  
Hac e tleân an oll falc'had,  
Côs ha yaouanq eus a beb oad.

*An Den Yaouanq.*

Allas ! sivoas, en joa ar bed  
E voa va speret occupet :  
Em yaouanquis voá va fianç,  
Hac em mignonet va esperanç.

*Ar Maro.*

Penos, den sot hac aheurtet,  
Ne voas-te qet avertisset  
Da reformi da voal vue,  
Pa ne voas qet sur a un de ?

*An Den Yaouanq.*

Allas ! me vel on faziet ;  
Mar plij ganec'h, c'hoas deportet  
Roit din ur blavez termen,  
Ma riu qent mervel pinijen.

*Ar Maro.*

Penos e fell dide ober  
Pinijen en qen ber amzer,  
Pa ne c'heus grêt bete vrémân,  
Ha te pell zo var ar bed-man ?

*An Den Yaouanq.*

Me bromet déc'h, a dra certain,  
E rin prontamant pinijen  
Da repari ma yaonanqis.  
Ma roit din termen eur mis.

*Ar Maro.*

Avoalc'h ec'h eus bet a amzer,  
Ma carjes ober da zever ;  
Mes ne alles pelloc'h appel :  
Eru an heur, ret é mervel.

*An Den Yaouanq.*

Pe n'en dé get ho polante  
Va lezel qeit-se en bué,  
Mar plij ganéc'h, da vianân,  
Un devez c'hoas a c'houlennân.

*Ar Maro.*

Harça ! bremâ paciantet :  
Eru an heur, rét é monet :  
Rac-se-ta, sonj es coall vue ;  
Ret é monet dirac Doue.

*An Den Yaouanq.*

Penos eta, mervel zo ret  
A greiz va nerz ha va yec'hét !  
Penos quittat va desseniou,  
Va joa, va c'herent, va madou ?

*Ar Maro.*

Diveat out bremâ da vouela,  
Homan é da heur divea :  
E zan da réi did an tol marvel ;  
En heur-mâ e renques mervel.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E  
GUERENT HA MIGNONET

O va c'herent ha mignonet,  
En han' Doue, va zikouret !  
Scoet oun gantan d'ar maro :  
Deut d'am zicour, hastit afo.

*Ar Guerent hac ar Mignonet.*

Evit bremân ne allomp get,  
Beza hon eus asfer bresset ;  
Pa retornimp, ni a velo,  
N'oc'h eus get a féçon maro.

*Ar Maro.*

Güel, den zot ha den aheurtet,  
Petra respont da vignonet !

Anzao bremân, den diavis,  
Peguer tromplus é yaouanqis !

*An Den Yaouanq.*

Güir a larit, me zo tromplet  
Gant yaouanqis ha mignonet :  
Bremân me ro dé mil mallos ;  
D'am oll maleur e zint bet caus.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT DOUE  
HAC AR VERC'HEZ.

Me o suppli, ô va Jesus !  
Hac'houi, Güerc'hez, Mam druezus,  
Me ho ped dre ho madelez,  
D'am zicour c'hoas, me pec'her qez

*An Autrou Doue.*

Penos ec'h eus an assuranc  
Da c'houlén ouzomp asistanc ?  
Bepret out bet hon adversour ;  
Petra ve demp-ni da zicour.

*An den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT AR ZENT.

O Zent, mignonet da Zoue,  
Ho pet truez ous va ene !  
Gant an oll oun abandonet ;  
En han' Doue, va zicouret.

*Ar Zent.*

Penos ec'h eus an hardisson  
Da c'houlén hor protection ?  
Ne c'heus qet miret hor goueliou,  
Nac imitet hon vertuziou.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E  
ÆL-MAD.

O va Æl-mad ! ô va den qer !  
Va gardien en peb anzer,  
M'ho ped, va sicourit bremâ  
Em necessite diveza.

*An Æl.*

Qement a ellén a meus grêt  
Bete vremân en da andret :  
Poent e zeo din d'abandoni,  
Pa ne c'heus qet sentet ouzin.

*An Den Yaouanq.*

Me vel ervad é tremenet  
Va amzer da veza sicouret ;  
Bebet e meus en libertin,  
Doue a rent justic erfin.

Em maro em diles Doue,  
Pa'm boa'n dilezet em bue ;  
Resistet meus d'e oll graçou,  
Hac cin refus em goulenou.

*An Den Yaouanq.*

E QUITTAT E GUERENT HAG E  
VIGNONET.

Dilezet oun en abandon ;  
N'en deus muj evidon pardon.  
Adieu, qerent ha mignonet,  
Adieu, bed fall ha miliguët.

*An Den Yaouanq.*

E QUITTAT JOAUSDET AR BED-MAN.

Adieu, grandeur ha bombançon,  
Enorion vén ha triomphou ;

Adieu d'an traou eus an douar ;  
Adieu d'an ée, adieu d'e c'hloar.  
Mallos d'ar vam, mallos d'an tad  
A zo bet ouzin qen ingrat,  
M'o deus grêt din coll va ene,  
D'am beza lezet em liberte.  
E zan da veza entèvet  
En ifern gant an dud daonet,  
Da lesqi ebars er flammou,  
Da james gant an diaoulou.  
Ha possubl ve, ô va Doue,  
E serfec'h ouzomp dôr an eê !  
Obtenit demp, ô va Zalver ?  
Eur plaç en ho cloar eternal.



E ty intañvez Ar Goffic, e Lanhuon.